

Huanado eur Skolaer

War don : *An hini goz.*

Dre brenesto ar gampr-studi
 Me 'wel an heol splan o skedi,
 Me 'glev richan, tra la la
 An evn bihan, tra la.

Siouaz ! me 'zo aman dalc'het
 'Vel eul lapous en e gaoued,
 E-tal an nor, tra la la
 O klask digor, tra la.

O, pa vin-me digabestret,
 Evel eun ebeul penn-follet,
 Me a fringo, tra la la
 Me a lampo, tra la.

War ma lerc'h me na welin mui
 'Vel eur c'hi klanv ar mestr-studi,
 Prest da zailla, tra la la
 Ha d'am drailla, tra la.

Me 'laro neuze kenavo,
 Kenavo, leorio, kaiero,
 Latin, gallek, tra la la
 Gregach, sôznek, tra la.

Me a gomzo ma brezonek,
Ma iezik kaer, ma iezik c'houek,
 Me a gano, tra la la
 Sonio ma bro, tra la.

Gant ma baltam me a ielo
Da lapouseta er c'hoajo,
 Me eo Anko, tra la la
 An evnigo, tra la.

Gant ma bag vihan me iel c'hoaz
Da besketa war ar mor braz
 Meilhi, grac'hed, tra la la
 Pe lenveged, tra la.

Pa ne vo ket an dour re ien,
O neûn war grîbel ar goumnen,
 E vin gwelet, tra la la
 'Vel ar pesked, tra la.

War ma c'hazek d'an daou-lamm-ru,
War lerc'h euz ma heul ma c'hi du,
 Didu em bo, tra la la,
 O foueta bro, tra la.

O pa vin-me digabestret,
Evel eun ebeul penn-follet,
 Me a fringo, tra la la,
 Me a lampo tra la !

GWENNAEL.